

Kanaouenn ofisiel Redadeg 2026

Poent eo

Amañ bep eil bloaz
Evel boaz
Degemer mat d'ar re n'anavezont ket
c'hoazh
Redek a raimp evit ar yezh
Enepe d'ar vezh
Pebezh arvest
Klevet ´vimp o kanañ, o choual
Ha ma vo stanket an hent
E tremenimp dre hentoù all
Asambles, eizh devezh, noz deiz
Galoupat ivez evit ar re lakaet da gostez
Redek a rin muioc'h eget na ´m oa graet
daou vloaz ´zo
Digropet ma divc'har, graet ma lasoù
Desket kanaouennoù, astennet ma
c'higennoù
Desket luganoù, ne serrin ket ma genou
Nerzh d'an holl bobloù minorelet
D'ar re wasket, d'an dud harellet
Harzhal giz ar c'hi, yudal giz ar bleiz
Betek ma vo ofisiel ar brezhoneg e Breizh

OOOOOOHHHHH !!
Poent eo, poent eo
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn da... Poent eo
cheñch penn da...
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn d'ar vezh !



Poent eo

Ha setu ni a-stroll adarre
Hep kilañ un troad warlerc'h egile
Da stokiñ diouzh kroc'henn an
douar
Gant nerzh, joa, ha kounnar
Ha ni o redek ur wechig c'hoazh
Gant muioc'h a fouge a vloaz da
vloaz
Da hadañ barzh ar pri
Greun, gwrizioù, gwez ar spi
Ha ni o tibunañ adarre
Hag adarre ur ger goude egile
Da stokiñ diouzh dor ar bed
D'e gelaouiñ ´maomp bev
bepred
Ha ni o kanañ plen
Ur vouezh ouzhpenn eben
Da glotiñ gant hent an oadoù
Warc'hoazh ha dec'h ha hiou

Bevañ bodañ bezañ
Muioc'h c'hoazh
Bevañ bodañ bezañ
Ken aes ha tra
Bevañ bodañ bezañ
Deus ´ta
Bevañ bodañ bezañ
Hei Hei ya !



Poent eo

Deus, da lakaat freuz ha reuz
Berr eo da alan neuze keuz az peus
Deus, da heul ar redadeg
N'eo ket ur vodadeg evit ar re a serr o beg
Tapet teus dale, paouez da vale
Tud deuet, bugale
Deomp de'i, « andale »
Dizale vo treuzkaset ar ger
Kuzh en o dorn gant ar vazh test adarre
War an asphalt, ar geot pe en dour memes
Lannuon ha Naoned ha
N'eo ket Douarnenez
Sav, sav, ´vit da yezh !
Sav, sav, ´vit da yezh !
Sav, nann, n'eo ket diaes !
Sav, nann, n'eo ket diaes !
Harzhal giz ar c'hi, yudal giz ar bleiz
Betek ma vo ofisiel ar brezhoneg e Breizh !

OOOOOOHHHHH !!
Poent eo, poent eo
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn da...
Poent eo cheñch penn da...
OOOOOOHHHHH !!
Poent eo cheñch penn d'ar vezh !

Bevañ bodañ bezañ
Muioc'h c'hoazh
Bevañ bodañ bezañ
Ken aes ha tra
Bevañ bodañ bezañ
Deus ´ta
Bevañ bodañ bezañ
Hei Hei ya !
Poent eo, poent eo
Poent eo cheñch penn
Poent eo cheñch penn da... Poent eo cheñch penn da...
Poent eo cheñch penn d'ar vezh !



Nolwenn Korbell ha Plouz&Foen